

CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilaouit, ma mignonnet,
Chanson an amourousted
A zo gant eur c'hernevad vit an deio composet

Amourousted zo eur guer
Hac a zo doug ha tener
Caus hé da vil nec'hamant hag ive da vil mizer

Pa vo an noz pe an de
Daou zen yaouank a goste
Quent ma c'houlfeong doaré he c'haruo gante

Ar pot a goze brao
Hac ar plac'h a deus foa.
Evit beza evurus na fot nemet eun dra.
Amourousted a ra dhe
Dimezi heb dale.

Pa vouing neve eureuget,
Vad a ra d'he n'em velet,
Casi na ra met unan an oac'h hag ar vreg.

Quen bras e ar garante
Ha quen bras an amitie
Neus an eil vit eguile hag en noz hag en de,
He ra deze lavaret
Pell zo clefemp beza dimeet.

Tudo yaouanc, me ho ped,
Memes tra divoallet,
Liessoc'h zo dimezet vit a zo ezet.

Guelet a meump a vejou
Cals a chanchamanchou,
Er menajou e caver bep sort ambarrassou,
Pa zeu en tieguezou
Cals deus a bouponou.
Unan a c'houlen crampoës
Hac eun all gallez.

Eun all zo en he gavel ho clasq donet er mes.
Ar vreg so dre an ti
Vel pa ve etourdi,
Na neus den evit clevet reson vad ebet ganti.
Fachet e deus e fried
Adieu d'an amourousted.

Tud yaouanc, mar em c'hredet,
Lacait eves, diouallet,
C'houi he an evurussan tud a so voar ar bed.

C'houi so dre ar pardonniou
Ha dre an assembleou,
O tansal, o c'hebattal, o c'hevan taquennou.
Eun den yaouank, mar gue fur,
So parfet he blijadur.

Hac ar re so dimezet
An darn vuyan meus goelet
A vanque eun dra benag d'alc'hammad do evurusted.

Darn so hac a laer ar yale'h
Ha darn all e ya war vare'h,
Re all a gar ar chopin, quen azvont me wawale'h.
Tud yaouanc, mar dimeet
Choaset tud fur ha parfet.

PA IH LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan
Souhaiti ferm a ran
Yec'het dan daou zen neve, chang ha prosperile.

Men ho ped, camaradet,
Vit eur farg, ne fachet ket :
Permettet e badinal en tre ar vignonnet.

Grag dimp da nem gavet c'hoas
Joaus evel biscoas
Ben an de-ma pen eur bloa, ebars ar memes plag,
Ho trinka gant ho goeren
Da yec'het ar poupon.

LENEINDE.